

D'ar 25 a viz Genver

- **Gouel Sant Paol Gonezet d'ar Feiz.** War-dro c'hwec'h vloaz goude Pignadenn ar Salver, ha goude bezañ savet a-du gant merzherenti Stefan a varvas o pediñ evit e vourevion, Saoul eus e anv gwirion, hag eñ ur Farizian ne rae nemet gourdrouz feizidi ar C'hrist, a voe galvet war hent Damask, dre c'hras Jezuz an hini a heskine da zont d'E-heul evit dougen klod d'ar Groaz ha dont da vezañ Abostol ar Broadoù.
- Er IV^{re} kantved, **sant Palemon pe Palamon**, penitiour e Tabenna e Tebaid, mestr sant Pakom.
- E Breizh, en IX^{vet} kantved, **sant Konhouarn**, manac'h. Da gentañ diskibl sant Fezwezhen, ez eas da vanac'h e Redon dindan sant Konvoion.
- E Kembre, er V^{vet} kantved, **santez Douenwenn** (Kb. Dwynwen) **pe Twina**, patromez ar re a zo e karantez. Hervez an hengoun e vefe unan eus merc'hed niverus Brec'han (Brychan), roue Brycheiniog. Roud eus he c'heelerzh a gaver e Breizh da skouer e Plouha (bro-Ouelo), e Sant-Maloù, e Pleudihen (bro-Zol).
- E hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos), er VI^{vet} kantved, **sant Eochad** (Gl. Eucadie), abostolour ar Bikted.
- E 676, merzherenti **sant Amarin**, manac'h e Luxovium, abostolour Elzas.

D'ar 26 a viz Genver

- Er bloaz a c'hras 97, merzherenti **sant Timoteoz**¹, eskob Efezoz. Keneil difaezhus sant Paol e voe, an hini tostañ d'e galon pa lavar an Abostol e oa feal dezhañ "*evel ur mab d'e dad*" (Fil 2,22). Da geñver e eil veaj, pa dremenas dre Listra, e voe badezet gant an Abostol hag e gemeras gantañ daoust ma ne oa nemet war-dro 20 vloaz. Lodennañ a reas karc'hidigezh kentañ an Abostol. Kenlabourat a reas da avielerezh Azia Vihanañ hag e voe fiziet ennañ renadurezh Iliz Efezos. An Abostol a skrivas daou lizher dezhañ, an eil o vezañ evel e destamant speredel a-raok e verzherenti.
- War-dro ar bloaz 100, e Gortina en enezenn Kreta, distro da Zoue ene **sant Titoz**², eskob, diskibl ha keneil sant Paol. Genidik eus Antiokeia e oa pagan a orin. Heuliañ a reas an Abostol en e veajoù. Hemañ a skrivas dezhañ ul lizher evit degas da soñj kristenion Korintoz kelennadurezh ar frankiz kristen e-keñver lezenn Moizez. Bevañ a reas pelloc'h eget e vestr merzheriet e Roma da vare Neron hag e varvas e touez e re d'e 94 bloaz d'ar 4 a viz Genver 100.
- Er bloaz 404, e Betleem, ganedigezh en neñvoù **santez Paola**, intañvez ha penitiourez. Hag hi eus un tiegezh senadourion Roma e timezas d'he seitek bloaz gant un den hegarat hag e voent evurus gant o femp bugel. Pa gollas he gwaz e tivizas mont da vBetleem gant he merc'h Eustochium, da heul sant Jerom he doa anavezet e Roma. E-kichen manati ar venec'h renet gantañ e voe hi e penn kumuniezh ar manac'hez.

1 Lidet e veze gwezhall d'ar 24 a viz Genver.

2 Lidet e veze gwezhall d'ar 6 a viz C'hwevrer.

- E 459, e Siria, **sant Simeon ar peulour**, anvet *an hini kozh*. Penitiour nepell diouzh Alep, en em dennas war ur peul lec'h ma vevas er bedenn dizehan, gant un engroez a weladennerion o tont d'e gaout.

- E 676, ganedigezh en neñvoù **santez Milgid**, manac'hez beneadat. Merc'h Marewald roue an Angled ha santez Ermenburg. Gant he c'hoarezed santez Mildred ha santez Milburg e wiskas ar ouel en abati Wenlock lec'h ma renas ur vuhez santel ha skouerius-meurbet.

- Kounidigezh an ebed santel, diazezourion abati Citeaux : **sant Roperzh Molesme**, marvet e 1111, **sant Alberig (Aubry)**, marvet e 1109, ha **sant Stefan Harding**, marvet e 1134.

- E Breizh, er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Tudian pe Tujan**, abad. Hervez lod e vefe breizhat met hervez hengounioù all e vefe un Iwerzhonad anezhañ ha zoken breur santez Berc'hed. Deuet da Vreizh e voe penitiour e Priveilh hag ivez e Brasparzh, a-raok dont da vezañ abad Daoulaz. Pedet e vez evit bezañ gwarezet diouzh droug-ar-chas anvet dres *droug-sant-Tujan* ha diouzh an darreuziadoù.

- E 649, **sant Konan**, Iwerzhonad, kelennet en enez Iona, abostolour Enez-Vanav, kelenner sant Fiagar (Fiakr).

- **Kounidigezh holl sent Enez-Vanav.**

- Warr-dro 1240, **ar gwenvidig Rodolf**, beleg, breur minor e Roazhon. Ganet war-dro 1307.

- E 1650, **ar bac'hiadez Mamm Janed ar Werc'hez**, dominigadez. Diazezañ a reas gant Mamm Marc'harid ar Spered-Santel kouent Merc'hed Sant Tomaz e Dinan.

D'ar 27 a viz Genver

- En ^{III}^{de} pe ^{IV}^{re} kantved, distro da Zoue **sant Juluan**, eskob Vindinon (Vindinum; ar Mañs) e Bro-gKiliman (*in pago Cilimanico*; Maine), e Galia, ha paeron an eskobiezh-se. Kaset e voe gant ar pab a-gevret gant eskibion all da avelañ Galia. Lod a lavar e voe kefridiet gant sant Pêr e-unan.

- En deiz-mañ kentoc'h eget antronoz e vo lidet e Breizh **sant Tomaz Akwino**³, beleg dominigat, Doazhour Meur an Iliz Hollvedel, marvet d'ar 7 a viz Meurzh 1274 war an hent da vont da Senez Lugdun (Lyon). Kaset en deus da benn an uhelvennad dominigat: arvestiñ ha treuzkas d'ar re all frouezh e arvesterezh. Stummet da gentañ gant sant Alberzh Veur e voe lennour er Sorbonne e Pariz. Diwar ar Skritur Santel ha tadoù an Iliz e kredas arverañ reizhiad prederouriezhel Aristoteles evit sevel oberennoù meur pergen ar *Summa Theologica*.

- E 1540 e Brescia e Lombardia, ganedigezh en neñvoù **santez Anjela Merici**, gwerc'hez, diazezourez an Ursuladezed. Hag hi o vevañ e-kreiz paganiezh an Azginivelezh, e verzas e teue dizurzh ar gevredigezh diouzh dizurzh an tiegezh. Goude un emziskouezadenn eus santez Ursula gant he c'heneilezed niverus, e tiazezas dindan he faeroniezh un urzh gouestlet da zesevel ar merc'hed yaouank d'ober anezho mammoù a diegezh stummet a-zoare.

3 Lidet e veze a-raok 1969 d'ar 7 a viz Meurzh. Hiviziken e vez merket d'an 28 en Deiziadur Roman met lidet e vo kentoc'h d'ar 27 e Breizh abalamour d'an Tad Juluan Maner a vez lidet d'an 28.

- E 1077, **sant Gildwen** (Gl. Gilduin), diagon, chaloni Dol, mab Riwallon, aotrou Dol ha Komborn, marvet e Chartrez p'edo o tistreiñ eus Roma.
- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **santez Morien**, gwerc'hez.

D'an 28 a viz Genver

- Er I^{añ} kantved, **sant Abibon pe Abibaz pe Abdiaz** (Lt. Abdibus), lesanvet **sant Diboan** e Breizh, mab sant Gamaliel, diskibl sant Jozef Arimatea. Desavet en deoliezh gant e dad a oa doazhour war al Lezenn, e tremene e holl amzer en Templ. Anavezout a reas Saoul a veze kelennet gant e dad. Badezet e voe pa oa war-dro ugent vloaz, a-gevret gant e dad ha Nigoudem, gant an Ebestel Pêr ha Yann. Lavaret e vez e varvas a-raok e dad hag e voe sebeliet gantañ e Caphargamal e-kichen bez sant Stefan lec'h ma voe sebeliet Gamaliel ivez diwezhatoc'h. O c'horf a voe dizoloet dre vurzhud gant ar beleg Lukian. (s.o. Kavidigezh korf Sant Stevan d'an 3 a viz Eost)

- Kounidigezh **ginivelezh santez Oanez Sanctae Agnae de nativitate** evel ma vez enskrivet er sakramanter Jelazian. Evel ma vez graet evit sant Yann-Vadezour e veze lidet gwezhall, pergen e Roma, ginivelezh santez Oanez d'an neñvoù da zeiz he merzherenti hag eizhteiz goude, d'an deiz-mañ neuze, he ginivelezh douarel.

- E Breizh, e parrez Plevin e Kernev, e 1683, distro da Zoue ene **ar gwenvidig Juluan Maner**, beleg eus Keneilezh Jezuz ha warlerc'hiad Dom Mikael an Nobletz. E-pad 43 bloaz en em roas an *Tad Mad* d'ar misionoù e Breizh-Izel, e Kernev peurgetket, hag e stummas ouzhpenn mil beleg war an dachenn. Mervel a reas e Plevin da-geñver ur mision hag e voe sebeliet eno hervez e vennantez: «*E-lec'h ma kouezho ar wezenn e ranko chom.*» Bez' ez eo unan eus tudennoù pennañ adsav ar feiz er XVII^{vet} kantved e Breizh.

- En Iwerzhon, e 530, distro da Zoue ene **santez Cainneire**, leanez, diskiblez sant Senan.

D'an 29 a viz Genver

- Er bloaz a c'hras 410, ganedigezh en neñvoù **sant Sulpicius Severius**, manac'h ha beleg. Genidik eus Aginnon (Agen) en Akwitania e voe breutaer da gentañ ha goude marv e wreg yaouank e wiskas ar sae manac'h war ali sant Varzhin ma savas e vuhez-skrid diwezhatoc'h. E vamm-gaer a brofas dezhañ un domani e-kichen Carcasona lec'h ma tremenas e vuhez er bedenn hag er studioù. Kenskrivañ a reas gant sant Jerom, sant Paolin Nola ha tudennoù meur e amzer.

- E Breizh, e 570, **sant Gweltaz lesanvet "ar Fur"**, abad Rewiz, *Doazhour ar Vretoned*. War a hañval ez eus daou sant gant an hevelep anv. An eil a voe ganet abretoc'h, e penn hanternoz enez Vreizh, e Dunbarton (Bro-Skos), desavet gant e eontr s. Padrig ha mignon da sant Kadog (gwelout an 30 a viz Genver), hag egile a vefe ganet e Glad-an-Hañv e Kembre hag e voe diskibl sant Ildud, beleget e 518, deut da Vreizh-vihan ha penitiour war enez Houad kent diazezañ abati Ruiz, diwezhatoc'h en em dennet war c'hlann ar Blañvezh gant e geneil sant Bihui en e gichen hag echuet e vuhez war enez Houad. War anv sant Weltaz «Dunbarton» («an Albanad») muioc'h eget war hini sant Weltaz Rewiz e vefe da lakaat ar skrid "De Excidio Britanniae" hag un "Epistola" hag ivez ul "Lorica", eleze ur bedenn hobregon evel hini sant Padrig.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **santez Bleuñvenn** (Bleuenn pe Bleuzenn), manac'hez, keginerez santez Berc'hed e Cill-Dara.

- En Iwerzhon, e 598, merzherenti **sant Dallan Forgaill**, beleg. Hag eñ ganet e Bro-gKonnac'ht, e oa kar da sant Aedhan. Anavezet evit e zeskadurezh lennegel hag e zonezon evit ar varzhoniezh e savas ur c'harm e bri da sant Koulmkell. Dont a reas da vezañ dall. Lazhet e voe gant preizhaterion hag hervez e vojenn en dije atoret e benn bet taolet er mor.

- Er VI^{vet} kantved, **sant Gwizian**, tiern e Kernev-Veur, kristenaet gant sant Samzun.

D'an 30 a viz Genver

- War-dro 226, e Roma, da vare Severus Alexander, merzherenti **santez Varzhina**, gwerc'hez. Goude marvidigezh he zad a oa koñsul e werzhas he holl vadoù hag en em roas da oberoù a garitez betek bezañ harzet evel kristenez. Dre ma nac'has disteurel he feiz e voe roet d'ar boureviadurioù krisañ betek bezañ dibennet. War-dro 676 e ouestlas ar pab Donus un vrientiliz dezhi er Forum. Eno e voe adakvet he relegoù e 1634 hag ensavet he gouel er bloaz war-lerc'h.

- War-dro 680, ganedigezh en neñvoù **santez Batilda**, rouanez ha manac'hez. Bet prenet evel sklavez saoz e teuas da vezañ gwreg Klodwig II, roue ar Franked. Pa gouezhas klañv hemañ e c'houarnas-hi ar rouantelezh gant mestroni. Skoazellañ a reas ar manatioù hag en em dennas hi he-unan en abati Chelles nepell diouzh Pariz.

- E 684, distro da Zoue ene **santez Aldegond pe Alda**, abadez. Merc'h Walbert Haino (Gl. Hainault) ha santez Bertilia, c'hoar sant Gwaltrud, diazezourez manati Maubeuge.

- E Breizh-Veur, er VI^{vet} kantved, **sant Weltaz an Albanad**, manac'h. Ganet eo en hanternoz an enezenn (deut da vezañ Bro-Skos diwezhatoc'h) e 421 e oa mab santez Darerc'ha, c'hoar sant Padrig, ha Konan Meriadeg. Fiziet e voe gant e vamm e sant Padrig a reas war-dro e zeskadurezh. D'e dregont vloaz e teuas da C'halia evit en em varrekaat war e studioù er manatioù. Beleget e voe hag ez eas da brezeg an Aviel en Iwerzhon hag war aodoù hanternoz Bro-Saoz da vare ar roue Trifan. War c'houlenn sant Kadog, abad Llancarvan, ez eas da gelenn an doueoniezh en e abati hogen ez ejont tuchantik da ren ar vuhez digenvez en inizi betek bezañ rediet d'ho c'huitaat abalamour d'ar vorbreizherion. En em dennañ a reas en abati Avallon (Glastembury) lec'h ma varvas e 515.

- E Breizh-Veur, er V^{vet} kantved, **santez Tudi ha santez Envael** (Kb. Enfail), gwerc'hez, merc'hed ar roue Brec'han.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Enan Rozmor** e kontelezh Wexford, manac'h ha feizvonnour, mab Gemman. Skrivañ a reas buhez santez Berc'hed.

- E 1083, e Regensburg, **santez Maelverc'hed** (Iw. Maolbhrighde), maouez santel, Iwerzhonadez.

D'an 31 a viz Genver

- Er bloaz a c'hras 410, e Roma, ganedigezh en neñvoù **santez Marsella**, intañvez. Patrikianez roman, kaer, pinvidik ha desket e kanttroas d'ar feiz kristen. Reiñ a reas bod da sant Jerom en he falez war an Aventin, hag eno en em vodas tud mennet da heuliañ alioù an Aviel. Pa zegouezhas Alarig e Roma e chomas en he unan hag hi pemp bloaz ha pevar ugent. Mervel a reas goude bezañ bet gwallgaset gant ar soudarded Got a glaske he arc'hant he doa roet d'ar beorion.

- E 1888 e Torino, **sant Yann Bosco**, beleg, diazeour Kevredad ar Salezianed ha Kenvreurezh Merc'hed Mari Skoazellerez. Abostolour ar yaouankizoù ma pleustras evito e garismoù a vurzhudour.

- E 491, **sant Gwaot** - e latin Gaudus pe Waldus , eil eskob Mediolan (Ga. Evreux), bet penitiour e koadeg geunioù Dol pe kentoc'h e koadeg Scessiacum pe Quokelunde lec'h ma vevas sant Patern ha sant Skubilhon.

- E Kernev-Veur, er ^{V^{vet}} kantved, **santez Morwenn** (pe **Morwenna**), gwerc'hez. Bez' e vefe unan eus merc'hed Brec'han. Goude bezañ bet desavet en Iwerzhon e treuzas ar mor evit en em staliañ e Kernev-Veur en ur peniti e penn un tornaod o valirañ a-us d'ar meurvor. Savet he dije gant he daouarn un iliz evit an annezidi lec'h m'emañ bremañ Morwenstow.

- E 884, **sant Euzeb**, Iwerzhonad, manac'h e Sant-Gall (Helvetia).

- E 626, **sant Aedhan** (eleze *Aezan*) pe **Maehog** (*Maezeg*), Iwerzhonad, diskibl sant Devi e Kembre, eskob Farna en Iwerzhon.

- E Breizh, e 1611, tremenvan **an Tad Noël Mars**, beleg. Manac'h beneadat e voe en Abati Lehon, kentañ vikel-vras Kenvreurezh Adstummet Breizh, marvet d'e 34 bloaz, tizhet gantañ blein ar beurvadelezh.

